


Pobl Vreizh

5L

Meurzh-Ebrel 1982 - niv. 139



Rewinoù kastell « Joyeuse Garde » er Forest-Landerne (gw. p. 4).

HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-79 ROAZON
CCP RENNES

4^e listennad

A. hag A.M. Kervern, Brest	80,00
A. Ily, Lesneven	20,00
J. Thomas, Antibes (06)	30,00
R. Noël	
Bar-sur-Seine (10)	10,00
P. Le Pogamp, Sant-Brieg	20,00
J.P. Le Rol	20,00

180,00

Diwar al listennadoù kent : 2010,00

War-un-dro : 2190,00

Eveljust, en amzer-se, da lavared eo hanterkant vloaz zo hag ouzhpenn, e vese kavet tud da lenn brezhoneg, peogwir e oa stank ar vrezhonegerion war ar maes, ha peogwir, warbouds nebeud, e oant brezhonegerion unyezheg. Ouzhpenn kement-se, berzh a rae kenañ ur gelaouenn netra nemed pe vese kasset en-dro gant ur beleg. « Feiz ha Breizh » ne oa ket hebkén ur ger-stur : bez' e oa iwe ar wirionez ; bezañ katolik ha bezañ Breton a oa ar memes tra, ewid al lodenn vrasañ eus ar Vretoned ataw.

Ha bez' e c'heller iwe, bez' e tiser zokén, displegañ e brezhoneg saypoent ur strollad politikel evel an UDB. Ewid kement-se eo bet krouet POBL VREIZH, daou-zeg vloaz so bremañ. Ha koulskoude, lennerion ger, hag her gweled a rit ervad, n'eo ket hebkén eus politikerezh an UDB eo e vez kaos war b/POBL VREIZH, na zokén eus politik hebkén. Liessort awalc'h eo ar gelaouenn ewid plijoud — mechañs — zokén d'ar vrezhonegerion na vefent ket a-du, a-grenn pe memes tamm ebéd, gant pal an UDB : tizhoud un emrenerzh sokialour ewid Breizh. Poaniañ 'raomp da reiñ deoc'h da lenn brezhoneg yac'h, da skrivañ ha da zisplegañ e brezhoneg ar pemdez kement hag a c'hella hor lennerion ober o mad gantañ.

Rebechet e vez deomp koulskoude ober re gant ur « brezhoneg ar pemdez ». Lavaret ez eus bet deomp gant lod e ouie **Anjela Duval** (peogwir ez eus hanv anezhi e-barzh an niverenn-mañ) komz brezhoneg ar pemdez gant an dud a yae d'he gweled (ur brezhoneg gallekaet awalc'h, evel 'm'eo heni ar beisanted war ar maes hiziv an deiz), ha skrivañ he barzhonegoù, ha zokén he fennadoù e komz-plaen, en ur brezhoneg glan meurbed-e-keñver geniaoueg, e « brezhoneg ar sul » eta. A zo gwir, red eo anzav. Ma ! Koulskoude, ne gav ket deomp e tarassomp ar brezhoneg pa skrivoamp en ur brezhoneg eñun awalc'h. Kavoud a ra deomp e tleomp delc'her da vont gant an tamm hent etre-se, da lavared eo chom heb ober gant ur brezhoneg er vras, hag a c'helle digalonekaad lod eus hol lennerion, berr o brezhoneg un tammig c'hoazh betekenn, ha chom heb saotrañ re ar yezh gant gerioù galleg lakaet a-fetepañs, dreistoll pa c'heller ober gant gerioù brezhoneg aas da gompen.

Laouen e vefemp, ne vern penaos, o c'houzoud pehini eo ho santimant war ar poent-mañ, rag ewidoc'h-c'hwil eo e skrivoamp, ha n'eo ket hebkén, na da gentañ, ewid ober plijadur deomp-ni hon unan !

POBL VREIZH

POBL VREIZH

KOMANANTOÙ
komanant-bloaz : 50 L
skoaz : adaleg 70 L
estrenvro : 70 L
an tamm : 5 L

KRP ROAZON
2746-79
CCP RENNES

Ti-Moullerezh « Iroste »
29200 Brest
Renner ar gelaouenn
Fañch Morvanou C P P A 50 091
1500 skwerenn

N'eo ket red adskrivañ ur wech muioùc'h na pegen chañchet eo an traoù. Dispartiet mad eo bremañ amzer-da-zont an Iles e Breizh diouzh amzer-da-zont ar brezhoneg. Deuet eo a-benn a re o deus strivet en hor raog d'ober eus ar brezhoneg ur benweg a c'heller displegañ peb tra gantañ, ha n'eo ket hebkén gwirionezioù an Iles katolik.

HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-79 ROAZON
CCP RENNES

BLOAZ WARLERC'H...

Bez' e c'hellfemp hiziv an deiz lidañ un deiz-ha-bloaz ouzhpenn : heni trec'h Penrener a-vremañ ar Stad war an heni kozh... Poent eo martese lakaad un termen d'ar c'his-se da lidañ ha da lidañ adarre : ur bobl na ouie nemed kompenn dewezhoù bras a liderezh a vefe muioùc'h douget moarvad da'n em velezoarfen en he zremened eged da vont war-raog ha da zastum nerzh en-dro ewid ur c'hrogaed newez...

Ewidomp-ni Bretoned, martese e c'hellfemp kaoud hor gwalc'h o weled ez a madig awalc'h mekanik ar Republik, o weled ez eus e-gis-se ul lesonn fur, pe ur pleg fur gant ar bobl soverren, peogwir, pa vez deuet ar mare merket gant an istor, eh en em lak ar momeđer da chañch tu ha da vont war an tu-eneb ; achiu o c'hoari gant ur vandennad, e vez chañchet skipañ, kement ha gweled hag-erf e vo gwelloc'h keustereun ar geginereun newez ; pa vez aet blas ar c'hozh gant an amann, e vez red meskañ ar ribod en-dro ha degass ur placad amann fresk war an daol... Amann mis Mae 'vez ar gwellañ, diouzh ma lavarer...

Anad eo o deus bet ar Vretoned ur begad bennag eus an amann freskse...

Koulskoude, ma'z eus ahanomp-ni iwe Bretoned sitoained eus ar Republik ha ma'z omp ni iwe bugale d'an Dispac'h, ne c'hellomp ket lakaad ur mouch war hon daoulagad ha huchal a-boues penn ez a mad kær ar bed ganemp, hag ez omp laouen ha disouris gant stad hor bro-ni.

Digoret ez eus bet un erwenn newez, gwir eo. Ra vo kasset al labour betek penn bremañ, hag aret ar park en e bezh. Ha pa gomzomp eus ur park, lavaromp diouzhu krak-ha-berr ez eo eus park Breizh e fell deomp komz. Gouzoud a raomp ervad ez eo bras an dienes e meur a bærk all eus ar bed bras. Med, zokén en hor park-ni e chom c'hoazh kalz da zifraostañ. Hed eo aessaad o buhez pemdezieg da labourerien hor park-ni : arabad gortos. Nebeutoc'h a labour ewid an oll (artisaned hag all), hag e-gis-se labour ewid an oll. Arc'hanter 'vez kavet pa vez c'hoant da gavoud, zokén ewid mont betek ur sizhunvezh-labour a bemb eurvezh ha treogant. Ur pæ deread ewid an oll, hag o vont da heul kresk ar prisioù.

Ar gwir santel ewid al labourerien d'en em vodañ en o sindikajoù ha d'en em zienn gant ar benweg-se, ur benweg bet govellet tamm-ha-tamm gant ar re o zo bet bewet en hon raog ; ur benweg n'eo ket displeget warnañ gwad ar vicherourien bet vanifestadedeg da gefver meur a zeiz kentañ a vis Mae... Ma'z eus hiziv labourerien (zokén ma'z eus re a dud dilabour) o labourad hag o krouñ heb ma vele ar c'hren hag ar spont en o c'hreis, ez eo a-drugarez d'ar gwad bet skuilhet kant vloaz gant tud all, micherourien, sindikalisted o deus aberzhet betek o buhez, ma c'hellomp ni, bremañ, labourad diwar ur gwir ewid unan eus gwirioù santellañ madden... Bez' ez eo labourerien Breizh iwe tud hag a ra bremañ o mad eus an emgannoù kozh-se.

Med bez' ez eo labourerien Breizh ouzhpenn, ur boblad tud a fell dezo bezañ anavezet hag anzavet ewid un eneseenn-Gors, hag heni ebéd ewid Breizh ? Perag e term kemendall he kehiall ewid adstagañ ouzh Breizh departamant an Naoned ? Perag gortos, bloaz goude trec'h ar Penrener newez, ewid roñ e blass d'ar brezhoneg e Breizh ? Perag gortos, ha gortos ataw ha gortos dalc'hmad ewid roñ da Vreizh an tu d'en em gavoud gwelloc'hig en he bleud ? Meur ha meur a dachenn labour a chom da zifraostañ e park Breizh, ma teulo da vezañ ur park fonnus an eost ennañ, pa weler pegen warlerc'hiet ennaomp dre amañ e-keñver kornioù all eus ar Frañs, pa ouezer pegen ponner eo bet warnomp kehiall poues Paris, Paris ewid kær deuet da

vezañ bras euzhus, Paris ewid penn ur Stad na sell ket kær ouzh ar rann-ur Stad na sell ket kær ouzh ar rann-ur Stadoù « pell », ouzh ur rannvro ewid Breizh...

Hed eo bremañ, da gefver an deiz-ha-bloaz-mañ, red eo goulenn c'hoazh ur steufvenn ekonomikel vrokus ewid Breizh he femp departamant, ha dreistoll ewid saveteñ al labour-douar, pinwidigezh ar vro a-viskoazh, ha koulskoude emma karrigel an Ankoù o kass d'ar bed all pe d'ar retred ped ha ped labourer-douar na vez lakaet heni all ebéd en o flass?... Kemendall benn pesketerezh ar vro, a yelo da netra, pedost, ma ne vez ket difennet hor pesketerien. Ha da heul al labour-douar hag ar pesketerezh, e teu labourioù all, da zienn iwe : ar stalioù kompenn-boued, ar rapañ-bagoù. Nag a draoù a boues a c'heller ober, nag a efed a rafé d'ar Vretoned kaoud ul lesonn a-rafozh ewid kompenn inti o hunan aletioù o bro !

Red eo bremañ, pa c'heller kaoud un tamm fiziañs bennag, ha kaoud kred e-barzh ar re a lavar e fell dezo degass ar chañchamant, red eo bremañ roñ da Vreizh ha d'ar Vretoned un digoll kær eus ar c'hollou bras o deus bet, abalamour da veur a zeg vloazewid politikerezh fall, hag abalamour iwe d'al falf bras bet roet da rannvroioù all eus ar Frañs, diwar hor c'houst-ni, diwar gortos Breizh. Eus Brest da Naoned, e c'hellomp-ni. Bretoned bewañ etrus ha labourad stard ewid ma ouzomp ober, dorn-dorn gant ar Frañsien all, dorn-dorn iwe gant meur ha meur a bobl all eus ar bed : ar justis ewid an oll, an erusteed ewid an oll, setu eus ar blas mad a c'hellomp kaoud gant an amann newez ribotet.

Komanant d'ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn

Pobl Vreizh (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez
Chomlec'h
a gass e gomanant	
Boutin : 50 L (1)	
Skoaz : 70 L pe ouzhpenn (1)	
Estrenvro : 70 L (1)	

(1) Divarkeit ar gerioù na servijet ket

Amañ an arc'hant
dre c'hakenn-host (1)
dre vandat-lizhar (1)
dre c'hakenn-vank (1)
CCP RENNES 2746-79



OC'H ADKAVOUD HON AMZER DREMENET

Da be skoliad eus Breizh e vez desket ar pezh eo bet kastell **Joyeuse Garde**, a zo e bourk **Forest-Landerne** ?

Lakaet e vez d'ober anaoudegezh gant kastell **Versailles** pe heni **Chenonceaux**... Med unan eus brudetañ testenioù istor Breizh a chom diavaez, ewid bugale **Lambal**, **Brest** pe **Saint-Nazer**... Bez ez eo kastell **Joyeuse Garde** heni marc'herien an « Daol Grenn », marc'herien ar **Roue Arzhur**... O kouezañ en e boull e oa, tamm-ha-tamm, abaoe un toullad bloavezhioù, ankouset gant an oll...

Chañchet eo an traoù war an dachenn un nebeud misoù zo. Ar gevredigezh « Mignonned Kastell Joyeuse Garde », hag a oa o'ch ober un hir a gousk, ez eo kroget enni endro nezh ar c'hoent-ober. Ena tud yaouank ar bourk hag ar patreioù tro-dro o poaniañ da gempenn rewinoù ar c'hastell, rag ne chom nemed rewinoù anezañ, hag emaint oc'h ober o seizh gwellañ ewid adkavout an istor anezañ, bet kuzhet

mad gant hor Stad-kreis. Tud yaouank eo ar re a gass an traou end-ro, ha me lar deoc'h e tegassont buhez e-barzh ar jeu, labour zo tro-wardro 1 Padoud a ray al labourioù betek fin an newez-hañv. Ar re o deus c'hoant reiñ sikour vad, n'o deus nemed skrivañ de :

Jean-Pierre Billont, Auberge de la Joyeuse Garde, 29220 LA FOREST-LANDERNEAU. Labour zo ewid an oll beb sadorn. Sur mad e vo kavet tud d'ober wardro an dismantrou prius-se, testeni a-boues eus hon amzer dremenet. Ne c'hellomp konlañ nemed warnomp ni hon unan, ewid laerezh diwargoust an dres, hag an diseblanted, ar pezh a zo deomp-ni : eus testenioù hon istor eo e komzan amañ, eus hon istor-ni war an tamm douar palates-mañ.

Diefivor e vez ar pobloù trevadennet ; red e vez diezo en em gannañ stard, ma chomo an Ankoù heb kass e labour da benn, ne gav ket deoc'h ?

J.L. Kerdouff

AR BREZHONEG ER SKOLIOÙ LABOUR-DOUAR

Newez gwraet 'm eus un enklask er skolioù labour-douar a vez gwraet « Ecoles Familiales » anezo. Tri-c'hant c'hwec'h respont ha pevargent 'm eus ressetet, o tont eus skolioù **Lokour-nan**, **Lambal-Gwiltmes**, **Landivisio**, **Montroules**, **Trelouenan** ha **Poullan**, ar skolidi o vevañ paotred dreistoll, med iwe un nebeud merc'hed etre 14 ha 18 vloaz. Setu da gentañ an disoc'h (résultats) :

1. Gouzout a rit brezhoneg ?
Ya : 76,9%
aes : 11,9%
mad awalc'h : 19%
un tammig : 46%
2. Daoust ha goust oc'h da gomz brezhoneg ?
Ya : 63,4%
aes : 10,8%
mad awalc'h : 13,6%
un tammig : 39%
3. Daoust hag e fell deoc'h deskiñ brezhoneg ?
Ya : 67,3%

4. Daoust hag e fell deoc'h e vefe ar brezhoneg un danvez-studi er skolioù « familiales », hag a servije 'barzh an arnodennoù (BEPA, CAPA, BTA) ?
Ya : 70%

5. Ar brezhoneg er gêr :
— an tad a gompren brezhoneg : 86,7%
— ar vamm a gompren brezhoneg : 88%
— an tad a gomz brezhoneg : 84%
— ar vamm a gomz brezhoneg : 80%
— an tad a skriv hag/pe/lenn brezhoneg : 38%
— ar vamm a skriv hag/pe/lenn : 34,7%
— an tad hag ar vamm a gomz brezhoneg kenetrezo : 67,8%
— an tad hag ar vamm a gomz brezhoneg gant o bu-

gale beb an amzer : 50,7%
— ar vugale a gomz brezhoneg kenetrezo beb an amzer : 19,4%

6. Ar brezhoneg er skol :
— ar skolidi a gomz brezhoneg er skol a-wechoù : 17,09%
— kavout a ra deoc'h ez oc'h skoazellet gant ar gelennerien da gomz brezhoneg ?
Ya : 48,09%

7. Mennoioù all :
— ar gerent zo ewid ma vefe kelenner ar brezhoneg d'ar vugale ?
Ya : 84,7%

— ar brezhoneg zo ur yezh heñvel ouzh ar re all ?
Ya : 83,2%
— ma fell deoc'h deskiñ brezhoneg, ez eo :
— ewid kompren gwelloc'h : 77,9%
— ewid komz gwelloc'h : 74,7%
— ewid deskiñ lenn : 25,7%
— ewid deskiñ skrivañ : 23%

Setu ase sifroù hag a ziskouez fraezh n'eo ket mouget ar brezhoneg nag ar c'hoant da zeskñ anezañ, ha zoken d'ober gantañ er vuhez pemdezieg. Red eo gouzout ez eo ar skolidi bugale diwar ar maes, o zud o vevañ labourerien-douar, 80% pe 90% anezo hervez ar skolioù.

Ha koulskoude, n'eo ket ar brezhoneg un danvez-studi er Skolioù « familiales ». Ur ragress zo da heuliañ ewid tremen an arnodennoù, ha douetus n'eo ket talvoudus awalc'h ar brezhoneg ewid bezañ labourer-douar hiziv ? Douetus, n'eus ket amzer da goll gant an danvezioù sevenadurel, dre vras ? Pezh a gont eo stummañ ar re yaouank da vevañ peisanted efedus, ewid ma c'hellint produñ muioc'h-mui a laezh, a gig... Red eo bezañ « rann-tabl », kea ! Ha setu dic'hastomp, ne chom ket amzer d'en em soñjal !

Piv a zo kaos da gement-se ? Ar gallowd politikel, anad eo. An heni kozh dreistoll, med an heni sokialour n'eo ket gwelloc'h betekenn...

N'eus ket pluss d'ar brezhoneg epad an amzer-skol, nemed diouzh an nos, pa vez skuizh ar skolidi !

— Ar brezhoneg n'eo ket anvzet evel eil yezh gant Ministr al Labour-Douar m'ema ar Skolioù « familiales » dindanañ.

Pa soñjer ez eo ar skolidi tud a-ziwar ar maes, ha setu m' o deus ar muiañ a chañs da gweled ha da zeskñ brezhoneg !... War ar maes eo, da va soñj, e c'hell ar muiañ ar brezhoneg chom ya'e'h, dre ma vez komzet c'hoazh ingal awalc'h. Ur vevzh eo gweled ne c'hell ket ar re yaouank-se deskiñ, er skol, yezh o zud. Padal, e vez kelenner saones dezo : n'eo ket homañ ur yezh didalvez, med ar brezhoneg a vije kalz aessoc'h d'ar skolidi, ha kalz plijusoc'h !

Poent bras eo ober un dra bennag ewid delc'her bew ar brezhoneg war ar maes. Dija, ar beisañted efedus, aet war-raog, kea, ne vez ken 'med galleg ganto.

Abaoe c'hwec'h mis emaoñ o c'hor-tos respont Rener an Akademiezh, hag heni Jo Gourmelon, kannad Brest, ha da dlee goullenn displegadurioù digant ar Ministr...

Mikael Konk

KRONIKENN AR SKIANTOÙ

Buhez war Titan ?

Goude bezañ beajet epad tri bloaz a-dreus an ec'horder kosmik, en deus tizhet ar satelit amerikan **Voyager I** ar gêr a-blanedenn **Saturn**, gwir plesenn an ebr gant he gwalenn tanaw. Ur wech all e pledfomp hirroc'h gant **Saturn** hag hec'h ameseges rannzel **Jupiter**, bet studiet diw a-dreus hag a-hed gant **Voyager I** ha **Voyager II**. Med an dro-mañ e taolfomp hon ewezh war **Titan**, brasañ satelit **Saturn**.

Aes awalc'h eo spurmantin **Titan** gant un teleskop bihan amatour, gwelabl evel ur poent lugernus nepell diouzh ar blanedenn. Brassoc'h eo eged hon loar. He diametr a vefe wardro 5000 km. Pell 'zo eh ouvezer en deus **Titan** un atmosferenn. An astronomour **Kuiper** a lakaas anad ar fed-mañ en 1944. Ar pezh a zo merkabl eo ez eus kalz a nitrojen pe azot (Simbol Kimiek N₂) enni. Beteg n'eus ket kehid-se, e sonjed e oa dreistoll **methan** (CH₄) 'barzh an atmosferenn. Diskaret eo bet ar

menos-se gant ardivinkoù-musuliañ **Voyager I**. En ur analisañ ar skinadurioù infra-ruz, ultra-limestra ha radio an astr, o deus gallet brastressañ kompenn kimieg an atmosferenn : **nitrojen** (8%), **argon** (12%), **methan** (6%), ar peurrest (2%) **idrokarburioù** ha dreistoll kompennadoù organik eus ar rummad nitrik evel an **drenkenn sianidrik** (HCN). Pouesus tre eo ar re-mañ, peogwir, hervez teorien ar biologour sovietik **Oparin**, e vefe en penn kentañ toud ar prozessous o kass d'ar vuhez.

Hervez **Oparin** enta, e vefe bet sintetiset kompennadoù organik evel an **drenkenn sianidrik** (HCN) adaleg koroù atmosferenn gentañ an Douar, ha se diwar leweson ar skinoù kreñv (ultra-limestra, X, ha gamma) o tont eus ar c'hosmos. Goude-se, e vefe en em dilezhet ar c'herpennadoù-se e-barzh an douar, ewid reiñ, a-benn ar fin, an trenkennoù aminot hag a zo diazez ar vuhez.

N'eo ket a-du ar skiantourien ewid

pezh a sell ar c'horfoù oc'h aosañ atmosferenn gentañ an Douar : pe ur meskad dour ha gas karbonik dreistoll, pe neuze ur meskad **methan** ha **nitrojen** dreistoll. Kemer a ra bremañ muioc'h-mui a boues an eil savboent diwar ar pezh a anavezur war **Titan**.

Arabad evelkent bezañ engortos a gavout un doare buhez war **Titan**. E demperadur zo wardro -150°C, hag ouzhpenn-se, n'eus takenn dour ebet warnañ ; hep dour n'hell ket ar vuhez diwan. Med red eo merket eo ar wech kentañ ma kaver molekuloù rag-buhez en atmosferenn un astr all estreded an Douar, ar pezh a laka da soñjal ne vefe ket ken dreistordinal ha se an heuliad feno-menoù o sintetisañ molekuloù ar vuhez. Moarvad n'eus nemed an Douar o tougen buhez, e-touesk ar planedennoù o treiñ end-ro d'an Heol. Med piv a orer en trowardurioù stered all ?

Yann-Ber MONTEIR

KENAVO, STEN...

D'ar merc'her 5 a vis Mae 1982 em bet diskennet e douar bered **An Alrae** ar charke ma oa ennañ korfig paour hon kenell, kenlabourer ha kamarad **Sten Kidna**...

E **Toulon** an heni eo e laas ar an douar **Etienne-Octave Quilma**, d'ar 14 a vis Eost 1916. Sed eus an hanf na seblant ket boud brezhoneg, na breizheg... Hag, ewid gwir, n'eo ket. A Vro-Euskadi e oa daet e daoù kozh, hag o doa diazezet o ziegzh e Breizh da gours an Dispac'h Gall, daou-gant-velé so bremañ, pedost. A **Sine**, porzhig brudet pleg-mor ar Mor Bihan, e oa tad **Sten**, ag **An Alrae** e vamm... E **Toulon**, oadet an tad er « marin », e reas ar familh he demeurfañ epad ur prantad.

Mad ha fruzzaus eo bet e gwazhiennoù **Sten Kidna** ar c'hemmesk etre gwad euskarad an heni breizheg. Bras eo, a-dra-sur, an hafvalded etre pobl ar Vretoned hag heni ar Vasked... A-viskoazh moarvad (beted an amzer ma'z eas d'an dias ar pesketaerezh « gis ar vro », newez so) emma bet stank an darempredoù etre pesketaerion kreizez Breizh ha re ur porzh el **St-Jean-de-Luz**, da skwer... E **Douarnenez** eh eus tud daet d'o oad, ganet e **Douarnenez**, med o tougen un hanf euskareg. Kement 'fall zo bet en em gvet, a-benn ar fin, ged familh **Sten Kidna**, med ur bochad koursoch'...

Kalz ne vern, daet e oa **Sten Kidna** da vout Breizhad, penn-ki-ha-troad... N'en doa ket desket brezhoneg a-vihanig, med abred awalc'h ur sort. Doned a rae getoñ ur brezhoneg plijus awalc'h : santet e vese ennañ distagadur an newezvrezhoneg, mes, ar-un-dro, ur poues-mouezh hafval med d'ouzh heni ar gweneded, mes ur gwenedeg pinwidikget ged lennadennoù niverus ha liessort'...

Mestr-skol a vicher eo bet **Sten Kidna**. Ha mestr-skol edan Stad. Ha, tra souezhus, mestr-skol edan Stad, ha kristen. Boud mestr-skol laik e bro ar Chouantid n'eo ket bet un dra aes, moarvad. Boud katolik e metoù ar skollataerion n'helle ket boud un dra aes naket... Dreistoll daou-ugent véle so, ha

nebeutoc'h c'hoazh moarvad etre 1940 ha 1944... Darempredoù en deus bet **Sten Kidna** en amzer-se ged kenelid dehoñ oadet e-barz ar Resistans, lod bet fusuilhet ged an Nazied : dehe emma dedet levz barzhonegou **Sten** ; **KANENN D'AR VUIHEZ**...

Bet eo bet **Sten**, e vuhez skollatour-pad, un test, un test dic'halloud hag emskianteg, na zivrezhonekadur Bro-Gwened, pa ne vez kén... Hag un test glac'haret. Rag ar galon an heni eo a gonte ar muiañ moarvad e personelezh **Sten Kidna** : un ene tener hag ur galon gisidig a oa ennañ. Kêr, ha lies gloaus a-dra-sur, eo boud renet ged ar galon. Ha gousafvet en deus **Sten** lies abalamour ma ne zae ket a-benn da vout mestr dalbezh ar e galon. Rag gwezh-a-vez e lle ar penn ren ar galon...

E meur a lec'h eo bet **Sten Kidna** mestr-skol, eraog boud hanter en **Alrae** mem... E **Sant-Eleust** eo bet, hag iwe, da gomañs en unan ag ar diw enesenn-mañ, **Houad** pe **Heudig** ma ne oa bet stank, en amzer-se, ar vistri-skol é klask moned di (nag en amzer-se nag hiziv an dez moarvad), namaed ewid chomel eno ar berraf ar gwellañ... Kontet en deus bet **Sten** e zonedegzh en enesenn, ar person (soutanenn getoñ en amzer-se) é'n em gavoud ar gas ar porzh, hag é pedirñ ar mestr-skol newez da gemer ur gampr er « porzh-person », h.a., h.a. Ne faota ket ankouaad ar perzh bras a vese kemeret ged ar person en diw enesenn-se, beteg newez so : bet eo bet **Marion**, unan a skrivagnerion Bro-Gwened, person **Heudig** epad pemp blié ha tregont, ha chomet eo emma epad an Dispac'h Gall penn-da-benn : pa vese gwelet ur vag é tostaad, soudarded pe archerion « glas » enni, eh ae ar person da guzhad ; diskouezh a raer eno eh ae o an oll Heudigis a-du krenn ged o ferson, hag a oa iwe o maer, o « assistant social »... Hag ur wezh e laas ar an enesenn ur bagad soudarded en o c'harg tapoud krog ar ar person didou ha dissent-se, hag a ataline ar Repu-

blik... Med e penn ar bagad e oa un ofissour bet, gwezhall, e skolaj **Sant-Iwan Gwened ged Marion**... Kuzhet e oa ar person, med fallig awalc'h... Ken e rankas an ofissour sliñ dehoñ e pleg e skouarn : « Monsieur le Recteur, cachez-vous mieux, sinon je serai obligé de vous prendre »... Sed e oa moarvad **Sten Kidna** en em vloed en enesenn-hont : dom-ha-dom ged ar person, hag e'ch ober skol e « skol an diaoul » ur sort !

Glac'haret eo bet **Sten Kidna** e vuhez-ved, e weled ar brezhoneg, yezh ur bobl, e'ch ober « droug » d'ar vugale, douzh o lakaad da chomel « arlerchet » e-kerver ar vugale gallegion... Glac'haret, é weled ar mammoù o trailhañ galleg saout dirag o bugale (« Mets pas tant que ça de beurre contre ton pain »), kentoc'h eged deskiñ dehe « yezh ar vezh »... Bet eo bet **Sten** un test glac'haret, gloaset en e ziabazh, é sellad, dic'halloud ha mantret, douzh kiladenñ divent ha dihartzus ar brezhoneg, e-korf an tregont véle tremen-mañ, e-diabazh ar bobl...

El lod-kêr ag an newezvrezhonegion, eh en em lakaas **Sten Kidna** abred da **SKRIV** e brezhoneg. Al lodenn vrasañ moarvad ag ar paper bet duet en 20^e kantved zo bet duet ged newezvrezhonegion. Ewid meur a abeg. Da gentañ, alies o devez an dud-ved-se bet desket brezhoneg ged levrou, ha da gomañs o devez poual awalc'h da lakaad ar brezhoneg en o beg, sed e kavont un « digoll », pe ur c'hempoues, ged brezhonekadur ar paper. Da eil, bras eo kred an newezvrezhonegion e-barz ar skrid, evel benweg da zienn ha da vrudañ ur yezh en arvar... Da drede, tud gredus e vez an newezvrezhonegion, é ma vez dalc'hmad diskibled newez kement kredenn zo. Ewid ar brezhoneg emma bet splann a-viskoazh an troc'h bras a vez kavet etre ar vrezhonegion nad int brezhonegion namaed dez zegouez istorel, hag ar vrezhonegion aet e-barz « Kompagnunezh Mignoned ar Brezhoneg », pe e vefe ar brezhoneg o yezh kentañ pe ur yezh disoloet ha studiet ganto árdro o 17 pe 18 véle... Ar re gentañ n'int ket gwall

Warlene hon eus lennet war b/POBL VREIZH ur pennad-kaos gant **IAN PRESS**, kelennet brezhoneg e **CITY LONDRES**. Setu, ewid ar bloaz, ur pennad-kaos gant tri eus ar studierion bet o teskiñ brezhoneg er skol-se : **ROBERT**, **JIM**, ha **PAULINE**. E brezhoneg eo bet dalc'het ar pennad-kaos-mañ.

Dastumet ha renket ewid **POBL VREIZH** gant **JANIG BODIUO**.

Pobl Vreizh : Ped vloaz zo eh oc'h o teskiñ brezhoneg er **CITY-LIT** ?

Pauline ha **Robert** : Tri bloaz so e teskomp brezhoneg er **CITY-LIT**.

Jim : Ha me, daou vloaz so.

Pobl Vreizh : Penaos eo deuet ar soñj deoc'h d'en em lakaad da zeskiñ ar brezhoneg.

Robert : Desket 'm eus kembraeg hag 'm eus gwraet ma soñj deskiñ brezhoneg iwe.

Pauline : En em lakaet an da zeskiñ brezhoneg, peogwir eh on o ren ar skol gemoweg er **CITY-LIT** iwe.

Pobl Vreizh : Pelec'h 'z peus desket kernoweg, **Pauline** ?

Pauline : En ur skol kernoweg e Kernow.

Jim : Deuet eo ar c'hoant din da zeskiñ brezhoneg peogwir eh on bet iwe o teskiñ kembraeg. Hag aet on da **Vreizh** epad ar vakañsoù.

Pobl Vreizh : Pelec'h out bet e Breizh ?

Jim : E Benodet on bet epad ur sizhunvezh, o kampañ, ha gant ar wetur eh on bet o vale bro e Bro-Gernev.

Robert : Me n'on bet biskoazh e Breizh.

Pobl Vreizh : C'hoant ho peus da vont da **Vreizh** ?

Robert : Ya, c'hoant 'm eus da vont, med un den kozh eh on bremañ !

Pobl Vreizh : Ha, te, **Pauline**, bet out bet e Breizh ?

Pauline : Bet on, meur a wech. Alies eh on bet e Trebeurden, e ti

mignoned din. Tremenet 'm eus iwe tri mis e Sant-Brieg.

Pobl Vreizh : Kavet ho peus tu da gomz gant brezhonegerien ?

Jim : Ne 'm eus ket ; ne 'm eus ket kavet tu da gomz gant ar dud.

Pauline : Ya, komzet 'm eus bet brezhoneg a-wechoù.

Robert : Me ne gavan ket an tu da gomz brezhoneg e Londres.

Pobl Vreizh : Lenn a rit pennadoù skrivet e brezhoneg ?

Robert : Lenn a ran tammoù. Levrioù brezhoneg 'm eus er gêr.

Pauline : Lennet 'm eus « Asterisk » hag an « Dalton » e brezhoneg.

Jim : Ewid c'hoazh ne lennann nemed levrioù-skol, med prennet 'm eus levrioù brezhoneg epad ma vakañsoù e Breizh, e-kerz mis Eost.

Pobl Vreizh : Petra 'gavit diaes e brezhoneg : ar stum da gaozeal, ar poues-mouezh, ar c'hemmadurioù ?

Pauline : Diaes e vez din kompren an dud pa gomzont brezhoneg, peogwir ne gomzont ket sklaer awalc'h, ne zistagont ket o gerioù.

Robert : Meur a son dre ar fri a zo...

Jim : Diaes e vez din kompren ar gerioù hir pa vezont distaget berr, evel « sizhun », a vez distaget « zün »...

Sed ez eus tu memestra da zeskiñ brezhoneg er maes eus ar vro, ha spi 'm eus iwe e teuy a-benn tamm kaos gant tud ar vro pa zeufont da **Vreizh** en-dro.



Robert, Pauline ha Jim.

ne'het gant ar yezh a gomzont, pe a gomzo o bugale war o lerc'h... En eil rummad, e vez kavet « tud a feiz », re bar d'ar visionerion bet aet war glask an enefoù, eraog ma vint kollet.

Bet eo bet **Sten Kidna** un den eta hag en deus bet duet paper e brezhoneg, epad daou-ugent véle, pedost... Etre 1951 ha 1956, sur, hag hirroc'h amzer madae, eo bet **Sten** e penn ar gelaouenn **En Had**, skrivet e gelaoued ewid tud Bro-Gwened : pa'z eas **Dihunamb** d'an dias, e 1944, ne chome netra e brezhoneg Gwened war an dachenn, namaed ar pezh a chome c'hoazh a gatechim brezhoneg d'ar c'hous-se pe a ganennoù brezhoneg oferennoù... Mad e oa eta hadiñ : pegours e tay an eost ?

Anavet en deus **Sten Kidna** Gwene-

dourion brudet abalamour d'o fluenn vrezhoneg : **Loeis Herriot**, **Roperzh ar Masson**, **Iwan Diberio**. Sur mad e vefe prisius kaoud entvorennoù skrivet getoñ, ma'z eus anehe, rag, na boud ne oa ket gwall gozh pa 'h eo daet an Ankoù d'ober ar e dro, e ouie **Sten Kidna** ur bochad traoù a-zvoud « patred ar brezhoneg » e gornad. Lod ag an traoù-se zo bet moulet ar ar gelaouenn **Brud newez**... Kass a rae **Sten** barzhonegoù iwe dre beb diw wezh d'ar gelaouenn **Al Liamm**...

Hag iwe da b/**Pobl Vreizh**. Ha n'eo ket hebken barzhonegou, daoust ma ouie **Sten** barzhoneg aes kêr. A gemment a ma oulomp, ar b/**Pobl Vreizh** niverenn 137 (Du-Kerzu 1981) emma unan ag e varzhonegou diwezhañ : « Dispac'her ».

Beteg mis Kerzu 1981 eo bet **Sten**

Kidna esel ag an **UDB**. Lies eo aet ar renk el danvez-kusulier-kanton, pe danvez-kannad en e dachad **An Alrae-Karnag**. Gouied a rae **Sten** predeg dirag an oll en ur mod fromus meurbet : ar galon dalbezh é komz ennañ, ar galon da gentañ...

Ksidig é ma oa, e sante **Sten** — beteg re — pegon rust eo ar vicher bewif. Ged un netraig e vese flemmet, pe e soñje dehoñ e oa bet flemmet. Sur eo e sante **Sten Kidna** na pegon poanuis eo boud den e-mesk tud na vewont ken dalbezh é breuder, é bliedi ne laran ket. Hag en deus gousafvet a-zvoud kement-se. Marse e oa e wironer getoñ, rag « ne vez gwelet mad namaed ged ar galon »... eme al louarn d'ar Prits bihan.

Ra vo skafiv an douar ar relegoù **Sten Kidna**...

AR FALZ

kelaouenn drimisiel an Emsav diazezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skollerien ha kelennerion **Vreizh** a-du gant ur skol vrezheg ha laik gwirion

Lennit **Ar Falz** ! Komanantit d'Ar Falz ! (40L ewid 4 niv.)

AR FALZ, Str. Kan-er-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTROULES
KRP 430-20 H ROAZON

AL LIAMM

ar gelaouenn nemet o riez, g wech ar bloaz barzhonegou, kontadennoù, pennadoù a-bes sort ha keleier

80 pajenn e pnb niverenn - Renner : Ronan Huon

komanant : 60 L - Studierion : 35 L
Tefzorer-merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

D'ar 7 a vis Du 1981 ez eo aet da Anaon Añjela Duval, ha sebetet d'an 12 e bered he farres... Araog lidoù diwezhañ ar vered, un oferenñ e brezhoneg hag e latin : ger galleg ebed, war c'houllenn groñs ar varzhes tre-menet.

Añjela 'oa he hanw-badez a varzhes, rag ewid he zud n'eo bet biskoazh 'med Añjel... Epad pell eo bet Añjel ur beizantes evel ar re all, evel Kantadoù a reoù all, e Breizh-Izel, e Breizh-Uhel, e Frañs, en Europ... Chomet eo bet Añjel di-zimez, petra bennag m'he dije karet, marteze, mont da heul unan... med : kevrin planedenn peb unan.

Pa varwas he zud, e chomas Añjel d'ober wardro he zamm menaj Traoñ-an-Dour he hunan penn. Evel « plac'h yaouank kozh o terc'hel tiegezh », ne oa ket Añjel an heni nemeti oc'h ober kemendall, a-dra-sur, nag e Breizh-Izel, nag e lec'hall.

Wardro ar maroù-se koulskoude e klevas Añjela galwedenn ar yezh hag ar vro. Neuse ez eas Añjela e-dibarzh ur gompagnunezh Bretoned kar-o-yezh, pe kar-o-bro, pe kar-an-div, ur gompagnunezh n'eo ket stank ar pesantesed enni, sur...

Sed e teuas Añjel da vezañ Añjela, hag e stagas ar beizantes-se, aet war an oad dija an tamm, ar vicher « barzhes » douz micher gozh he zud hag o gouenn a bell zo...

Beteg ur serten point, eo bet Añjela Duval « Filotea » an Aotrou Marsel Le Clerc, person Bulien, ur paotr eus bro c'hallaou Aodoù-an-Hanternos, deuet da vezañ ur gwall vrezhoneger, ur mailh war ar brezhoneg, an deus gwraet anezhi yezh e galon, daoust ma n'eo ket bet yezh e gawell.

Gant person Bulien eo bet stummet, heñchet, kalonekaet Añjela Duval. En e gelaouenn « Barr-heol war feiz ha Breizh » o deus kavet bod mared eus barzhonegoù Añjela, med ive e-barzh « Ar Bed keltiek » (diw gelaouenn aet d'an traoñ, siwazh, an heni gentañ meneget n'eus ket gwall bell zo), ha c'hoazh war « Al Liamm » pe « Imbourc'h »...

Warlerc'h an abadenn tele e galleg (rummad « Les Conteurs », gant André Voisin), e reas hanw Añjela Duval tro ar bed hag e teredas an dud betek Traoñ-an-Dour, niverusoc'h-niverus-sañ...

E-barzh Kan an Douar (Embann. « Al Liamm »), e kaver al lodenn vras-sañ, al lodenn gerrañ eus barzhonegoù Añjela Duval.

An aessañ, ewid ober anaoudegezh gant Añjela Duval, e oa mont di war ar pemdez, diouz ar gouañ, pa vez fall an amzer ha bered ar deiz. Neuse he devese Añjela muloc'hig a amzer da ouestlañ d'he gweladennierien, hag i skolveuridi. Dreistoll pa wele Añjel he devese afer gant brezhonegerien, he skuitze ket, chom a rae da gontañ,



Bez ez eus koulskoude en hor meskoù tost dimp Tud o tebrin tud. E bev, ya. Ronfled O sunañ o gwad betek an diwezhañ berad.

ANGELA DUVAL 1964

d'ober goullenoù, da selaou, e-ser serevijañ ar c'hafe hag ar c'hrampouezh... Lavaret ez eus bet, ha skrivet, e oa chomet he zi gant Añjela evel ma oa pa oa he zud e-barzh daou-ugent vloaz, pe nebeutoc'h... Lavaret ez eus bet, ha skrivet, e oa chomet ti Añjela evel ma oa ti hor mammou-kozh, hanterkant vloaz so... A zo re wir. Red eo lavaret ouzhpenn, koulskoude, ez eus c'hoazh, hiziv an deiz, e Breizh-Izel pa ne ve ken, meur ha meur a di heñvel-mik douz heni Añjela... Med gwir eo e selle da Añjela mireoud he zi evel ma oa pa oa he zud ennañ...

Pa'z ae ar gaos war ar politik, e vese gwelet diouzhtu ne oa ket stummet ar vaoues-se, ken leun a furnes ahendall, a-feñ politikerezh. Kement tra mad ewid Breizh, ewid ar brezhoneg, ewid ar beizantes, da mad ewid Añjela, ne vern eus pessori « kostezenn » e teuent pe e oant da zont. Beteg paotred an FLB, Yann-Kel Kernalegen hag all, e

lavare Añjela en o c'hompren, ma ne lavare ket tre ne oa nemed an hent-se da gemer ewid tizhoud un dra bennag ewid Breizh...

Eus Edith Cresson, ministres al labour-douar er marewezh-mañ eus ar Stad C'hall-PS, e vez gwraet, ewid doare, « la parfumée »... Ne vefe deuet da zen ebed ar gomz-se war beg e deod, nag an ide-se en e denn, ewid henwel Añjela Duval ! Ar c'hwes vad a vese santet e Traoñ an Douar o oa heni ar maestiou, ha'vouezenn hag all. Med ive c'hwes vad ha nerzhus ar bokidi hag ar briñsad-tilh bet kutuilhet gant Añjela. E ti Añjela ne vese ket an nen e ti ur vordianes, e ti ur wir beizantes, ur wir Vretones ne laran ket.

Aet eo Añjela kuit a-ziganeomp. Chom a ra bew en hor c'halonoù, chom a ra bew en he gwerzennoù. Ema hec'h ene bras o plavañ a-us d'ar vro...

F. MORVANNOU

Kemeret e vez poan gant ar brezhoneg memestra... Bremañ p'ema ar yezh en arver — evel yezh komzet, evel un dra vev eta —, bremañ pa gomz Giordan eus un « digoll istor » da reif d'ar yezhoù bihan bet m'ouget, flastret, mezhekaet, bremañ p'ema ar bed-oll dre harz mont da rouantelezh an untoniezh hag an disesper, bremañ, ya, muloc'h eged biskoazh, e leer kemer soursi gant yezh kozh ar vro, ma ne 'h ay ket a vev da varw...

En amzerioù kozh ez eus bet aet meur a gant yezh d'ar marw, dinec'h kær ar pobloù gant o zremenav... Chañch mestr, chañch yezh, chañch komad a rae ar pobloù, diouz ma vesent kasset-digasset gant balaenn rust an istor... 'Bez' e c'helle ur yezh merwel ; piw 'n defe gwraet van ? Braw c'hoazh pa ne vese ket lazhet an dud evel ma vez gwraet o stal d'al laou...

Al latin e hunan zo bet kasset da vered ar yezhoù marw. Gwir eo ez eus bet savet diwar ar c'hoñf marw-se meur a yezh kar dezañ : ar yezhoù romaneg. Med al latin e hunan n'eo ket kén yezh neb pobl : bez' e chom c'hoazh yezh ofissiel an lles katolik roman ; kavoud a rae c'hoazh, amañ hag ahont, un nebeud kanfartet hag en em lak da gomz latin assambles pa c'hoarvez gante bezañ bodet war zigarez pe digarez. Ma ra an dra-se plijadur dezo, gwel-a-se ewito : ne ra droug da zen ebed gweled pe kweled tud o latineg assambles. Med, kær vo ober, marw eo al latin : n'eo ket ur yezh vev kén, ha pell zo...

Ar pezh ne fell ket deomp just awalc'h eo e teufe ar brezhoneg da vezañ yezh beb an amzer un nebeud tud droc'h, a-benn kant vloaz ahann. Red eo deomp der'chel d'ober eus ar brezhoneg ur yezh komzet, komzet gant meur a gant mil a Vretoned ma 'z eus tu... Med daoust hag-entv n'emaomp ket o huñvreal, ha daoust hag-entv e c'hellomp lãred n'eo ket toulet dija bez ar brezhoneg e bered vras ar yezhoù aet da eskem ?

Ne oar den ebed peleni eo amzer-dazont ur yezh... Ahanta, ar pezh a vez gwraet, eo evel ma 'n defe ar brezhoneg meur a gant

JOS CORBEL

OBER GANT AR BREZHONEG

MANUEL PRATIQUE DE BRETON FONDAMENTAL

GRANDS DEBUTANTS

SKOL VREIZH

vloaz dirakañ, araog merwel, ma rank ober...

Setu, da vihannañ, ar pezh en deus soñjet ha gwraet JOS CORBEL, pa 'z eus deuet ennañ ur froudenñ, ur froudenñ vad : sevel hag lakaad embann ul lev'r nevez da zeskiñ brezhoneg. Deuet eo er-maes, embannet gant SKOL AR BREZHONEG, dindan an titl a : OBER GANT AR BREZHONEG.

Bet kelennet saoneseg epad pell, e oar JOS CORBEL ar mod hag an tu da zisplegañ elfennoù ur yezh. Ouzhipen kement-se, bet eo bet ar brezhoneg yezh kentañ JOS CORBEL, peogwir eo deuet war an douar un tammig ouzhipen hanterkant vloaz so, en un tiegezh peizanted eus Bro-Oueloù. Sed

e oar JOS talvoudegezh ar varc'hadourezh emañ o paoues kass da foar al levrioù brezhoneg.

Nema ket JOS kennebeud o klask gweled ar brezhoneg o vont d'ar vered. Ha ma'n deus poaniet epad tost da zeg vloaz ewid sevel, kempenn, frammañ ha fichañ ul lev'r nevez da zeskiñ brezhoneg, ez eo abalamour en deus c'hoant bras e teufe bugale Vreizh (re Vreizh-Izel pa ne pe kén) da gompren ha da gomz ur yezh hag a zo bet heni o zadoù kozh epad 1500 vloaz.

Da gomz, ya. Ra vo neuse digoret frank dorioù kement skol a zo da yezh ar vro. Ma vo studiet er skol, komzet er skol, ha komzet er-maes eus ar skol. Arabad e teufe ar brezhoneg da vezañ ur yezh sebetet ha balzamet, hag ez afe ar Vretoned da bokañ d'he arched, evel ma vez poket da relegoù ar Sent.

Pev bennag, kelenner pe get, a fell dezañ deskiñ, pe deskiñ gwelloc'h ar brezhoneg, a gavo e-barzh lev'r JOS CORBEL boued yac'h, fornis ha pasket mad. Ewid klaseadoù bugale ezomm dezo, pe c'hoant dezo peuzeskiñ ar brezhoneg eo bet savet e lev'r gant JOS CORBEL, dreistoll.

Degermet mad neuse d'al lev'r nevez-se. Kavet vez da bremañ e ti ar varc'hadouren moarvad, med bez' e cheller ive skrivañ da : SKOL VREIZH, 1, Plassen ar Marc'hallac'h, 29210 MONTROULES.

Komantit d'he gelaouenn c'halleg an UDB

Le Peuple Breton

(service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanv hag hanw-badez

Chomlec'h

Boutin : 60 L (1)
Skoaz : 70 L (1)
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre c'hakann-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre c'hakann-vank (1) CCP RENNES 2369-76

(1) Deskiñ ar gerioù na skrivoñ ket



LIZHER

Kenvroad ker,

Emaon o paoues lenn POBL VREIZH, ur gelaouenn dedennus kenañ anez, a blij din kalz...

Ne skrivan ket deoc'h ewid degass da soñj deoc'h ez on komanantet, hogen ewid reiñ deoc'h da c'houzout ez on bet souzhet o lenn en ho pennad-skrid diwarbenn SAINT NEVEN, ar frasnenn-mañ tennet dioutañ : « ...rag aet eo e vrud, da heul e relegoù marteze, betek bro ar C'hallaoued, Gallaoued Breizh a-vremañ a fell din lâred, ma kaver enni ur barres o tougen e hanw, Saint-Méen-le-Grand... »

Daoust hag-ehv ez eus fentigellerezh kuzhet dindan ar frasnenn-se ? N'ouson ket ? Ne 'm eus ket komprenet ar frasnenn-se ; hogen, an dra am eus komprenet eo e vez sellet ganeoc'h, en ho penn, ouz an tu-mañ a Vreizh evel un douar estren, e vez gwraet ganeoc'h, ahanomp-ni Breizhuheles, Gallaoued...

Meizus e vije bet e genoù ur brezhoneger bennag, di-zesk diwarbenn istor Breizh, hogen e genoù rener ur gelaouenn emreder, pegen iskis ha pegen trist eo ! Daoust hag-ehv n'eo ket ho roll deoc'h soñjal ar vro en he fezh ?

Daoust hag-ehv ne vije ket bet tro da c'houverkañ unaded don ar vro, kentoc'h eged sevel ur voger en he c'hreis, ur wech ouzhpenn ?

Un dra dister, a respontoc'h din ? Ne gav ket din ; rag, da'm meno, gant ar c'homzoù eo e krog ar gwirvoud.

E-pelec'h emañ Breizh, d'ho meno ? Ewid ar pezh a sell ouzhin, ne welan-me, amañ na Gallaoued Breizh, na Bretoned Bro-C'hall, Breizhis en harlu en o bro dezo ne lâran ket.

Trugarez deoc'h memestra ho pije roet tro din da skrivañ un tamm brezhoneg.

Kenavo.

E. Granville, 35600 Redon

Trugarez vras a lâran d'ho lenner ha komananter a Redon, brezhoneg ken yac'h o toni gantañ, hag ehv o chom en ur c'hornad eus BREIZH ma

ne vez ket komzet brezhoneg ennañ mui meur a gantved zo.

N'on ket fached eveljust, ha ne oan ket o farsal pa'm eus skrivet « bro ar C'hallaoued, Gallaoued Breizh a-vremañ »...

Ma 'z eus ur gudenn, n'eo ket unan zister tamm ebed. Med, da'm meno, n'eus kudenn ebed.

E-pelec'h emañ Breizh ? War ar gartenn lakaet amañ dindan emañ ar respont.

E 845, eo bet trec'h, e BALLON, tre kichen REDON, gouarnour Breizh NEVENOE war armeoù CHARLES AR MOAL hag e Franked.

Abaoe mil bloaz, d'an nebeutañ, emañ Breizh gant he harzoù a-vremañ, gant he femp departamant.

« Breizh istorel » a vez gwraet eus ar Vreizh-se : 29+56+22+44+35 = BREIZH.

Med n'eo ket dre hor gwall-ni, brezhonegerion Breizh-Isel ar bloavezh 1982, n'eo ket dre hor gwall-ni ma n'eo ket brezhonekaet ar Vreizh-se « eus Eussa betek Klissun »...

Rag, kær 'vo ober, kær 'vo lâred, kær 'vo huchal, kær 'vo leñvañ, n'eo

bet biskoazh unyezheg hag a yezh vrezhoneg ar « Vreizh istorel »-se, hag a zo ive ar Vreizh a-vremañ a stourmomp ewiti « eus Eussa betek Klissun », hag eus Enes-Sun betek Ros-war-Gouenon.

Diw yezh istorel zo e Breizh, hag un tredre, deuet eus an diavaez. Ar galleg, yezh ofissiel ar Stad C'hall eo an tredre yezh-se. An diw all a vez kavet, unan anezo, ar brezhoneg, e kornog ar vro, hag eben, ar gallaoueg, e reter ar vro. Diw yezh, teir mar karer, med ur bobl hebken : pobl Vreizh...

Penaos lavared « les Gallos » e brezhoneg ? Da lavared eo, pessor hanw reiñ da Vretoned Breizh-Uhel ma chomer war dachenn ar yezh ?

Gallet 'm defe, eveljust, skrivañ « betek bro hor c'henvrois a Vreizh-Uhel, betek bro Breizhuheles ». Eveljust, N'e'm eus ket keuz koulskoude, na tamm morc'hed ebed, o vezañ skrivet « betek bro ar C'hallaoued, Gallaoued Breizh a-vremañ a fell din lâred ». Rag, kavoud a ra din n'e'm eus dismegañset den ebed...

Pa oan 12 vloaz, pe wardro, eo ar wech kentañ ma 'm eus gwraet

anaoudegezh gant Bretoned a-ziwar ar maes na ouient ha na gomzent ket brezhoneg. Beteg neuze 'm boa klewet diw yezh e Breizh : ar brezhoneg, du-mañ, er gêr, en ilis, war borzh-c'hoari ar skol, hag e kement ti, hent, park ha prad eus ma farres, hag ar galleg e-diabarzh ar skol, epad ar c'hlass, ha skrivet war levrioù, hag ar yezh-se eo hon oa da zeskñ, rag, diouz ma embanne hon tud, hor mistri-skol, arsa, an oll, honnez eo a oa alc'hwez an deska-durezh... Ha setu bremañ Bretoned all, krennarded evel-domp-ni Breizh-Isel, na gomzent ket ar galleg re vad kennebeud, hag a lavare e oant « des Gallos », hag a-wechoù e klewemp anezo, chuchumuchu, o komz « gallo » kenetrezo. Lavared a raent e oa ar « gallo »-se galleg fall, un trefedolach na raent muioc'h a war outañ eged na raemp-ni ouz ar brezhoneg... Divezatoc'h, e klewis Roazonis o lâred din : « Nous ne sommes pas des vrais Bretons, nous sommes des sots Bretons »... Divezatoc'h 'c'hoazh, kalz diwezatac'h, e klewis gant unan e oa ar « des sots Bretons »-se ur brizhdistagadur eus « des Haut-Bretons »...

Bremañ neuze, penaos lavared « les Gallos » e brezhoneg heb ober gant troidigezh ar ger « les Haut-Bretons », hag a dalv, ewid gwir, kement pa « Breizhuheles » ? N'e'm eus ket termet tamm ebed pa'm eus skrivet « ar C'hallaoued »... Ewid tud Bro-Wened (lodenn vrezhoneg departamant ar Mor-Bihan), e talvez « ur Gall » kement hag « un Gallo ». « Ar vro Gall », ewid ar vrezhonegerion o chom tost ouz harzoù ar brezhoneg, zo « le pays gallo »... hag « les Gallos » a vez gwraet « ar C'hallaoued » anezo...

Gwir eo ez eo, ewid darn, « ar C'hallaoued » « les Français » ive... GREGOR ROSTREN, en e c'heriadur galleg-brezhoneg 1732, a lavar kement-mañ :

« FRANCE, Royaume, Gall, bro Gall, bro c'hall, Françz, ar Rouantielez a Françz » (432).

« FRANÇOIS, qui est de France, Gall, p. Gallaouéd (Van. Gall. p. Gal-léud) le mot vient de Gall, c'est proprement Gaulois (...)

« Les français. Ar Gallaouéd, ar c'hallaouéd, Francisyen, Gallis ».

« FRANÇOISE, celle qui est de France, ou du pays où l'on parle

français, à la différence du pays breton. Gallès, p. Gallésed (Van. id. » (434).

« GALOIS, ou galot, terme de basse Bretagne, pour dir, celui qui est du Pais François, de la haute Bretagne. Gall. p. Gallaouéd (en terme d'injure : gall-brein. p. gallaouéd-vrein » (447).

Ne dalv ket ur boan « tabutal » hir-roc'h. Kehid ha ma talc'ho Breizhuheles da lavared ez int « des Gallos » hag e komz « gallo », e c'heilimp-ni komz anezo evel « Gallaoued Breizh », tud o komz « gallaoueg ».

Gwelloc'h e vefe lavared ewid « les Français » « ar Fransisien »...

Fiziañs 'm eus ez on bet sklaer awalc'h...

Kenavo deoc'h, paotr kaloneg eus Redon, Breizhad iâder ha kadarn ar trawalc'h a galon ho peus bet ewid en em lakaad da zeskñ ar brezhoneg. N'eo ket sur 'm bo me ar memes kalon ewid krogñ gant ar c'hallaoueg.

Teir yezh mar karer, mes ur bobl hag ur vro hebken : BREIZH. Gant gwellañ gouic'hennennou

F. MORVANNOU, rener ur gelaouenn emreder POBL VREIZH.

STAJ DAOLAMM GWENEDEG (AR FALZ BRO-GWENED - I.P.L.E.)

E Gwened, adaleg an 28 a Vezheven betek an 3 a vis Gourhelen, e vo dalc'het pewartez staj daoulamm gwenedeg aaset gend SKAF Bro Gwened (Skolaelion ha Kelennerion AR FALZ).

Pris : 700 Lur en oll (ewid predoù, nosioù, kelennadurezh gend labourer). 20 pless, 6 montour. Titouroù : Jean-Claude LE RUYET, Ar Prioldi, 56840 ENES ARZH.

KREISENN VAKAÑOÙ-HAÑV K V B B

Diwezheg (brezhoneg-galleg) eo ar greisenn : diasezet e vo e CEG S'zun (29237), etre an 29 a vis Gouhere hag an 21 a vis Eost, ewid bugale n'ousont tamm brezhoneg ebed pe o c'houzout nebeud a vrezhoneg.

Bez he deus ar greisenn assant ar « Yaouankis ha Sportoù », ar pezh a ro tu d'ar gerent kaoud madennoù vakañsoù.

Pris ar maread : 1270 L. Aoadur : AR FALZ. Ewid kaoud titouroù pe enskrivañ bugale, mont e darspenn gant : Sekretourva AR FALZ, 1, Plasenn ar Marc'hallac'h 29210 MONTROULES. - Pellg. (98)62.17.20.

Paperenn ewid goulen mont e-barzh UDB


Hanw hag hanw-badez 19

Chomlec'h 19

Goulen a ran moner e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) 19

Sin : Da gass en-dro (troec'h et pe adskrivet) da UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX



MINI BANQUE 24

LE NOUVEAU LIBRE-SERVICE BANCAIRE

Crédit Mutuel de Bretagne

POBL VREIZH

16^e Kendalc'h an UDB e Naoned

D'an 10, 11 ha 12 a vis Ebrel diwezañ (Sadorn Fask, Sul Fask, Lun Fask) eo bet dalc'het e Naoned, brassañ kêr eus Breizh ha gwir gêrbenn anezi, 16^e Kendalc'h an UDB, ur mis araog kentañ deiz-ha-bloaz an 10 a vis Mae 1981, ma 'z eas e-barzh, a-benn ar fin, an Tu Kleiz Gall. Un Tu Kleiz hag a zalc'h da vezañ Gall, petra bennag ma ne vez ket Bro-C'hall heni ar Frankis dalc'hmad. N'eo ket es-natur kennebeud eo e tiwan ar Frankis diwar an Tu Kleiz : aes eo gweled kement-se abaoe ur bloaz, aes eo gweled pegen nec'het e chom ar Galloud pa vez hanw eus ar Frankis, aes eo gweled ez eo leun a zislavarioù an doare a zo gant an Tu Kleiz Gall da ren ar Frañs.

N'eo ket ewid keloù-se hon eus keuz da vezañ votet war an tu kleiz bloaz zo, rag, forzh pegen lureüs e chom paotred an tu kleiz e Paris ewid astenn rouantelezh ar Frankis (diwargoust e c'halloud-efñ hag ewid mad ar vicherourien, al labourerien hag ar rannvroioù), bez' ez eo an tu kleiz-se gwelloc'h evelkent eged an tu dehoù. Koulskoude, en ur ober ur bloaz, n'o deus ket paotred ar PS espernet o foan ewid bezañ int-i ar mestr, hag int-i o hunan ar gwellañ m'o deus gellet...

Ar pezh he deus gwraet an UDB epad Kendalc'h Naoned eo diskouez, klask diskouez da vihannañ, e c'heller bezañ eus an tu kleiz, heb bezañ Gall da gentañ, hag heb bezañ matezh gant ar PS. Da lavared eo, e c'hell an UDB (hag e tle, beteg ur serten poent) ober un tammig hent ha kerzhoud dorn-ha-dorn gant ar PS, hag iwe gant ar PCF, heb bezañ chadennet koulskoude. Ar pal lakaet war wel e Naoned a chom ar memes heni : roiñ da c'houde e tle Breizh bezañ emren ha sokialour, embann e tleer bremañ stourm ewid ma tizho Breizh hec'h emrenerezh sokialour.

Delc'her a ra an UDB da zisklêriañ iwe ez eus eus un trevadennerezh-diabarzh e rouantelezh Frañs aet da Republik, hag ez eo red da Vreizh bezañ dishual war an tachennoù politikel, ekonomikel, ha sewenadurel, ha kement-se ewid mad labourerien Vreizh. N'eo ket trawalc'h komz eus ur sistem « a-beb-eil » : goude **Mitterrand** e c'hell **Giscard** dont en-dro, pe **Chirac**, pe unan all. Ma n'eo an tu kleiz a-vremañ nemed ar sistem « a-beb-eil »-se, neuse ez eo ken dañjerus ewid amzer-dazont hag amzer-vremañ pobl Vreizh evel pobl, ha ma oa dañjerus ha marwel an tu dehoù. Bremañ, gant an tu kleiz aet e-barzh, e tleomp huchal e rank chom e penn an

traoù : n'eo ket awalc'h ewid pobl Vreizh e vefe aet an tu kleiz e-barzh, med un diasez zo ase gantañ ne oa ket tu d'her c'havoud e mod ebed gant ar gouarnamant kent.

Ur vro mestroniet eo Breizh, bloñset abaoe kantvedoù gant ur galloud kriz kreisennet e Breizh. Mont war un digreisennañ gwirion eo kentañ dever an Tu Kleiz Gall, anezañ, sañset, ur galloud sokialour, da lavared eo prest da genlodañ ha gwraet, sañset, ewid se. N'ema ket ar PS en e gefridi kempenn ar gapitalouriezh hag ober ganti. Derc'hel a ray an UDB eta da ziskouez e chom hi emren a-dal d'he daou vreur Gall, ha da embann e tle Breizh iwe tizhoud hec'h emrenerezh.

Un emrenerezh hag a zle mont e-barzh al lesenn, med iwe, ha dreistoll, e-barzh ar fedoù. Ur Vreizh emren ewid labourerien Vreizh a dalvez ur vuhez pemdezieg aessaet, gwellaet ewite, rag ahendall ne chomje ar ger « emrenerezh » nemed ur ger ewid ober plijadur d'un nebeud skrivagnerien douget d'an huñvre, ha laouen gant awel ha moked ar frasenoù. Ur steuñvenn eo ema labourerien Vreizh o c'hortos. Ewite ha gante eo ema an UDB o stourm, hag ewid-se e tleer en em harpañ stard war sindikajoù al labourerien, hag a zo anezo binwiji red ar gwellaenoù da zegass war dachenn al labour : heb ar sindikajoù ne vo savet na lakaet en he plom sokialouriezh ebed.

Eveljust, ez eus bet hanw e Naoned eus ar mouezhia-degoù : bez' e vo ar bloawezh 1983 unan a-boues ewid an UDB, gant al listennoù tier-kêr da sevel, ha dreistoll gant ar re a gasso kannaded d'ar rannvro. Ur rannvro Vreizh m'ema enni Bro Naoned, daoust ma chom bouzar ar galloud PS a-vremañ, evel ar galloud kent, pa vez hanw da lakaad departamant an Naoned e-diabarzh Breizh endro. Ewid pezh a sell ar botadegoù-rannvro, ez eo gwraet he soñj gant an UDB diwar vremañ : mont d'ar stourm dindan he banniel-hi, en hanw Breizh hag ar Vretoned.

Pa vez ur C'hendalc'h, e vezer douget da deuler ur sell war e goustiañs. Setu ar pezh he deus gwraet an UDB e Naoned hi iwe. Chomet eo en he sav, n'eo ket bet lonket gant ar PS na ne vo ket gwraet. Breizhekoc'h eo deuet an UDB da vezañ warlerc'h Kendalc'h Naoned. Ma 'z eus ul lizherenn hag a gont e-barzh an teir a ya d'ober hanw berraet an UDB, ez eo an trede. Da viken eo unanet Breizh hag an UDB.

